

# AR ZOUDARD FOUGEER HA LORC'HUZ

FANTIK ANN DURKEZ, *groeg ar marichal*

Sellet ! sellet ! ar briz-aotro !  
Penez e lugern he voto !  
Eur ribod blevek (1) war he ben,  
Keid a losd eur big he chupen ! (2)

**Diskan.**

*Kis ! Kis ! ma c'hi, d'ar briz Breizad !  
Bec'h da gof-kar ar renead ! (3)*

JANNED AR GWIN-TOMM, *amiegez.*

He vleo zo ranned ha flouret,  
He voustacho ru zo peget,  
Stumed e giz da higenno  
Evit pesketan kalono. **DISKAN, Kis...**

MARGOD HIR-VEK, *hostizez.*

Eur gouriz glaz (4) enn he gerc'hen,  
War he zaoulagad diou weren,  
Ouz he chaden grizillono,  
War he grabano manego, **Kis...**

JAKETA FLEMM-RU, *fornierez.*

Kozeal a ra kraouennek,  
Distagan ra peziou gallek,  
He dad a zo, *monsieur mon père !*  
He vamm, ma plich ! *madame ma mère !* **Kis.**

ANN ITRON K. L., *skolerez.*

Beteg ar loudouren (5) he c'hoar,  
A zo breman *mamzelle Victoir !*  
Ma aotro n'eo med, *un vieil âne !*  
Ha me, *une fichue bazane !* **Kis...**

METIG AR WIBER, *kouerez.*

He dad, eur c'hakouz a ligne  
A gign koz kezek a zoare,  
He vamm a rastel enn hent braz,  
Gand he c'hrabano figez glaz (6). **Kis...**

KATO FRI MINEOUED, *groeg ar c'heréer.*

He c'hoar, foei ! a zo leanez  
E leandi ar Patatez ;  
Ha gweled hon deuz, ann aotro,  
He roched louz 'mez he vrago. **Kis...**

LOÏZA MITAOUIK, *leanez.*

Ne zalud Person na Kure,  
Vel eur païan e tou Doue,  
Ne gred ket tamm, d'ann Diaoulo,  
D'ar Bugel Noz, na d'ann Teuzo (7). **Kis...**

MADALEN RAN, TAN, PLAN, *groeg arn tabouliner.*

Seiz vla eo bet zoudard brudet,  
War Dour Malakoff neuz kludet,  
Ha paneved n'ouzonn petra  
E vije kabiten brema. **Kis...**

Seiz vla eo bet zoudard brudet,  
 War Dour Malakoff neuz kludet,  
 Ha paneved n'ouzonn petra  
 E vije kabiten brema. *Kis...*

MARTINAN BIM, BAON, *groeg ar c'hloc'her.*

Ato ! zoudard ! eur zoudard kaer !  
 Zoudard (resped d'hec'h) ann talier (8) !  
 Ar marmouz biskoaz n'euz gwelet  
 Med tan ar gigin, enn oalet !

N'en deuz gweled enebourien  
 Med war zu gin ar vedalen ;  
 Ma neuz lazed eunn enebour  
 N'euz-han beuet gand eunn tenn dour. *Kis.*

MIKELIK BEK MEL, *plac'h majorez*

Mestrezed a lavar, neuz bet,  
 Ken na wie pelec'h lampet,  
 Ha renket n'euz skampa dre laer,  
 Pe vijent deud d'he heul d'ar ger. *Kis...*

JOBENNIG AR C'HAVR, *danserez kounnaret*

Ouz ar vombard ra eur sutel,  
 Ouz ar zac'h biniou, eur porc'hel,  
 Danserien ha danserezet  
 A zo eur stroll zaoud penn follet ! *Kis...*

ANN HOLL GOMEREZED ENN EUR VOUEZ

Harao ! war-n-han, prim ac'halen (9),  
 Koz kemenerik, brouder c'hoen,  
 Kerz da glask da *grinolino*,  
 Da strinkerez (10) ha da louzo !

*Kis ! Kis ! ma c'hi ! d'ar briz Breizad !  
 Bec'h da gof-kar ar renead !*

(1) *Eur ribod blevek*, da laret eo eun tok fonz hir.

(2) *Chupen*, pe porpant.

(3) *Renead*, an hini a dro kein d'he fe pe d'he vro :  
 rénégal.

(4) *Eur gouriz glaz*, eur gravaten.

(5) *Loudouren*, en Treger : eur gouillouren, da laret  
 eo eur plac'h louz. Eur lavar koz a disk dimp :

N'euz nemet eur lannac'h dour  
 Entre net ha loudour.

(6) *Figez glaz*, koc'h kezek tomm.

(7) *Teuzo*, des fantômes, des revenants.

(8) *An talier*, le croupion.

(9) *Ac'halen*, en Treger : prim ac'han : vite d'ici.

(10) *Strinkerez*, une seringue : strinkerez dour.

Cette pièce est tirée de **Bombard Kerne, Jabadao ha Kaniri**, de Prosper Proux. En vente à la librairie Eveillard et Brébant, à Guingamp.